

| <b>Divinadennoù</b><br><b>Bet embannet gand Pierre Martin (Gwiskri 1868 – Gourin 1935), beleg, e-barz Mouez Kerne e 1900.</b>   |   |
|---|---|
| <b>Goulennou</b>  | <b>Respontchou</b>  |
| 1- Petra a ya d'ar ster hag a laosk e gov er gêr ?  | Eur holhed.   |
| 2 - Petra a zegouez ar hentañ er foar ,   | An hent.  |
| 3- E pe miz e prezeg ar merhed an nebeutañ ?  | E miz c'hwevrer.  |
| 4 -Petra a zo ar stanka er foar ?   | Bleo war gein al loened.  |
| 5- Petra a vihanna dre ma taoler e-barz ?   | Eun toull.  |
| 6- Petra eo ar zotañ tra a gaver en ti ?  | Ar zil, rag ne zalh nemed an traou vil.   |
| 7- Petra 'vez trohet war daol heb boud debret ?   | Ar hartou.  |
| 8- Petra a skin e zent d'ar re a'z a en ti ?  | An drêzenn.   |
| 9- Me 'm-eus eur wezennig a-dreñ va zi, Gwelloh he hrogenn eviti.   | Eur bod kanab.  |
| 10- Petra a ra an dro d'ar park heb mond e-barz ?   | Ar hleun.   |
| 11- Pere eo ar pesked heb drein ?   | Ar pesked-ebrel.  |
| 12- Pesort jao ne chom en e zao nemed pa vezer warnañ ?   | Vilimpett <sup>1</sup> Chann Beg-an-dro.  |
| 13- <i>Yann</i> :Roit din unan euz ho teñved ha 'm-bo kement ha deoh.<br><i>Job</i> : Roit din unan euz ho re, ha me 'mo an hanter muioh evidoh. Pegement en-doa pep hini ? | Yann en-doa pemp, ha Job seiz.  |
| 14- Petra a ya a-dreuz d'ar foar ?  | Eur zahad ed war eur jao.   |
| 15- Me 'daol eun draig dreist va zi, pa'z an da glask me a gav tri.   | Eun ui. (Eur vi).   |
| 16- Mar doh eun den ken avizet,<br>Evel ma klevan hel lared,<br>Laret din eta just ped min <sup>2</sup><br>'Zo oh ober iliz Gourin ?  | O degaset din war ho kein ha me o honto.  |
| 17- Pere eo an tri zra diêsañ d'ober ?  | Skolma lost ar had ; revina eun den paour hag ober eur stag gand eun dornad zabl. |
| 18- Petra a hell golei parkou ha lanneier ?<br>Heb boud gouest da holei ar feunteun hag ar ster ?   | An erh.   |
| 19- Petra a vir e vantell d'an hañv e-giz d'ar goañv ?  | Ar siminal.   |
| 20- Petra a reom oll war eun dro ?  | Kosaad.   |
| 21- Perag e kouez ar glao ?   | Rag n'hell ket sevel.   |
| 22- Yann a lare d'e vab :« Bremañ zo daou vloaz e oan eiz pemp gwech kosoh evidoh, hag a-benn bloaz ne vin 'med pemp gwech. Pe oad en-deus Yann, ha pe oad en-deus e        | An tad 34 bloaz hag ar mab 6 vloaz.   |

<sup>1</sup> Vilimpett : ?

<sup>2</sup> min : mein.

|  |   |
|--|---|
| vab ?  |   |
| 23-Bizied he-deus hag eun troad<br>Med n'he-deus na penn na lagad,<br>Ha koulskoude da bep friko<br>Kaoud a ra an tu da vond atao.             | Eur fourchettez.  |
| 24- Piou 'zo mab d'ho tad heb boud ho<br>preur ?   | C'hwi hoh-unan.   |
| 25- Piou eo patron an Archerien ?  | Jozue, rag en-doa greet d'an heol chom 'n e<br>zao.                                     |
| 26- Du e-giz an diaoul, ha diaoul n'en-de' ;<br>melen e-giz an aour, hag n'en-de', ha ront e-<br>giz eur voull ha boull n'en-de'. – Petra eo ? | Eur billig arem.  |
| 27- Petra a ra al labous er hoad<br>Pa ne bouez nemed war eun troad ?  | Sevel an troad all.   |
| 28- Petra en-deus dent ha ne grog ket ?  | Eur grib.   |
| 29- Bleo a zo dindannañ<br>Hag aliez warnañ<br>Ha kaer ho-peus boud braz,<br>Eñ eo uhelloh c'hoaz.   | Eun tok.  |
| 30- Petra eo an tri zra da gas d'ar foar ?   | Eur pemoh (respet deoh) heb dirohal ; eur hi<br>hep trolal, ha diou vaouez hep kaozeal. |
| 31- Genou digoret,<br>Diouskouarn hep kleved,<br>Kov heb bouzellou,<br>Troid heb ivinou.   | Eur pod.  |
| 32- Petra ne ev nemed dour hag a gerz bepred<br>d'an treuz ?   | Eur hanig   |
| 33- Petra a ya d'an iliz war e benn ?  | An tach.  |
| 34- Treuzi a ra ar ster, skañv war eun troad,<br>En e benn n'en-deus nemed eul lagad.  | Eun aval.   |
| 35- Braz o henel,<br>Bihan o vervel.   | Eur houlaouenn.   |
| 36- A-dreuz ar mene'<br>Hep kov nag ene.   | An avel.  |
| 37- Petra a ya d'ar marhad<br>An daelou en e zaoulagad ?   | Eun tamm amann.   |
| 38- Pa'z oh paotred hag o-deus fri,<br>Piou 'zo furch-difurch dre an ti ?  | Eur skubellenn.   |
| 39- Piou eo an itron eet da vatez,<br>Kollet ganti bleuñ ha perlez ?   | Eur skubelenn.  |
| 40- Skrivet yeot seh gand pemp lizerenn.   | Foenn.  |
| 41- Pebez kemm a zo etre ar mezhier hag al<br>loar ?   | Ar mezhier a zo leun bemdez hag al loar eur<br>wech beb miz hepken.                     |
| 42- Eun dra ha n'eo ket bet gwelet biskoaz.  | Eun neiz logod e skouarn ar haz.  |
| 43- Me 'm-eus eun armelig wenn<br>N'he-deus alhwez na prenn.   | Eun ui.   |
| 44- N'on ket roue hag e tougan eur gurunenn ;<br>n'on ket marheg ha koulskoude em-eus<br>gentrou ;   | Eur hog.  |

|   |  |
|---|--|
| n'on ket skrivagner hag e tougan eur bleuñenn ;<br>n'on ket keginer ha koulskoude e ran da zebri.                           |  |
| 45-Pebez kemm etre ar bragou fall hag ar hlasker boued ?  | O-daou e houlenont eun tamm  |
| 46- Petra 'zo du-du, 'vel an tok,<br>Ha pa gouez e ra "flak" ?  | Ar bern kaoh saout.  |
| 47-Daou vreur o-deus ar memez oad<br>Ha n'o-deus na penn na troad.  | Daou lagad.  |
| 48- Gleb atao<br>Hag atao en dishlao.   | An teod.   |
| 49- E Roudoualleg e oa bet batizet unan disul<br>ha ne oa mab na da dad na da vamm, na da roue, na da Zoue, na d'an diaoul. | Eur plah.  |
| 50- Petra en-deus liou an diaoul ha diaoul<br>n'eo ket, liou an aour hag aour n'eo ket ?                                    | Eur billig-arem.   |
| 51-Petra a lip treid kement den a ya en ti ?  | An treuzou.  |
| 52- Petra a welom bemde'<br>Ha n'hell ket boud gwelet gand Doue ?   | Or mestr.  |
| 53- Petra a ya founnuso dre al lann evid dre an hent braz ?   | An tan.  |
| 54- Evid petra e hourvez ar zaout ?   | Rag n'hellont ket azeza.   |
| 55- Petra a ra an dro d'ar hoad heb mond e-barz ?   | Ar rusk.   |
| 56- Nijal a ra heb diouaskell ha redeg a ra heb divesker.   | Ar houmoul.  |
| 57- Evid petra ema ar gaou heñvel ouz eur voull-erh ?   | Rag ma kresk en eur redeg.   |
| 58- Petra n'en-deus na kig nag askorn hag a zoug koulskoude pevar biz hag eur meud <sup>3</sup> ?                           | Eur maneg.   |
| 59- Petra a verra en eur hirraad ?  | Al lagad.  |
| 60-Petra a dañva pep tra heb lonka netra ?  | Al loa.  |
| 61- Evid petra ema eur spillenn heñvel ouz eun den dall ?   | Rag m'he-deus eur penn heb daoulagad ?   |
| 62- Da biou e heller da genta lared ar sekrejou ?   | D'ar gaouier, abalamour ne vo ket kredet.  |
| 63- Petra 'n-eus beg ebed hag en-deus dent koulskoude ?   | Eur grib.  |
| 64- Petra en-deus bepred 'hed an troad ?  | Eur votez.   |
| 65- Daou o toullo,<br>Daou o selled toullo'<br>Daou o selaou toullo'<br>Hag unan o skei war an toull.                       | Eur pemoh. E zaou droad a doull, e zaoulagad a zell, de ziouskouarn a glev, hag e lost a sko war e benn-dreñv. |
| 66- Petra a zo izelloh gand e benn evid heb e benn ?  | Eur penn-gwele.  |
| 67- Petra a ra eul leue p'en-deus eur bloaz ?   | Eñ a grog en e zaou vloaz.   |

<sup>3</sup> meud : eur biz-meud.

|  |  |
|--|--|
| 68- Evid petra ho-peus diou skouarn hag eun troad hepken ?   | Abalamour eo gwelloc'h selaou evid prezeg.                     |
| 69- Evid petra e chom al loar bepred gwenn ?   | Rag ne gaver skeul ebed hir a-walh evid rei eul liou all dezi. |
| 70- Daoust e peleh e kavin eun dra heñvel ouzon ?  | Eur millouer. (eur melezeur).                                  |
| 71- Anaoud a ran eur gwaz ha n'en-deus bet mamm ebed biskoaz.  | Adam.  |
| 72- Petra ne welom ket hag a bouez warnom bepred ?   | An oad.  |
| 73- A ya hag a'z a, biskoaz eun dro ne ra.   | An nor.  |
| 74- Petra a heller kaoud e-barz eur chakod skarzhet ?  | Eun toull.   |
| 75- Peleh 'vez kejer Langoned pa vez an heol kuzet ?   | En disheol.  |
| 76- Petra a ya bemdez euz ar Faoued da Gerrien dre Lannijen hab fichal na garr na troad ?                            | An hent.   |
| 77- Yann en-deus seiz merh, ha peb unan euz e verhed he-deus eur breur, ped krouadur en-deus Yann ?                  | Eiz.   |
| 78- Piou eo an dud hag a garfe boud born ?   | An dud dall.   |
| 79- Petra 'zo greet pell 'zo hag a vez greet koulskoude bemdez ?   | Ar gwele.  |
| 80- Petra 'zo ganet en dour hag a zouj koulskoude an dour ?  | An holen.  |
| 81- Pehini euz rouaned ar Frans en-deus douget ar gurunenn vrasañ ?  | An hini en-doa ar penn brasañ.                                 |
| 82- Me 'm-eus daou loenig e korn va hraou,<br>Unan 'lar gwir, an all 'lar gaou,<br>Hag ar memez tra a laront o-daou. | Eun oh hag eur wiz.  |
| 83- Petra a zoug e galon en e benn ?   | Eur penn-kaol.   |
| 84- Petra en-deus ar memez pouez, karget pe diskarget ?  | Eur vegin.   |
| 85- Petra en-deus dent hep kaoud gwech ebed droug enne ?   | Eun heskenn.   |
| 86- Peleh e hellan ho kweled e leh n'oh ket bet biskoaz ?  | E-barz ar milouer (eur melezeur).                              |
| 87- Petra 'zo ganet er hoed hag a ya d'ar ster da gana ?   | Eur vaz kannerez. (ar holvaz).                                 |
| 88- Petra a grog war-lerh e varo ?   | An drein.  |
| 89- Pehini eo al loen hag en em stag ar gwellañ ouz an den ?   | Eur helaouenn.   |
| 90- Daou zister a dra<br>Mar n'int toull ne dalvont netra.   | Eun nadoz hag eur bouton.                                      |
| 91- Seul vui e zo <sup>4</sup><br>Seul nebeutoh e pouezo.  | Toullou greet er plankenn.                                     |
| 92- Petra a zoug pouez eur pikol ti ha n'hell  | Ar mor.  |

<sup>4</sup> e zo : ez eus.

|   |                            |
|---|----------------------------|
| ket dougen eun alhwez ?   |                            |
| 93- Pesort boull a ra aon d'al laer ?                               | Eur bouldog <sup>5</sup>   |
| 94- Petra a chom aliez bouzar<br>Pa gaser ar paour-kêz d'an douar ? | Ar hloh braz               |
| 95- Petra a fich bepred<br>Hab distag gwech ebed ?                  | Lost eur vuoh.             |
| 96- Petra a heller ober heb argant ?                                | Dle.                       |
| 97- Petra a vez e ivinou bepred a-raog ha pa gerz ?                 | An troad.                  |
| 98- Petra en-deus e gornou en e benn-dreñv ?                        | Ar zah.                    |
| 99- Pe varz e tiskenn ar <i>baromètre</i> an izellañ ?              | Pa gouez war an douar.     |
| 100- A zo bet beo hag a zo maro, hag a vale war gein ar re varo.    | Eur vorez-ler war eur bez. |

---

<sup>5</sup> Eur bouldog : galleg.